



Spisverkoù ar 4vet evit ar Brevet



1789-1799: an Dispac'h gall

Get ar c'hrogad **Bastilh** d'ar 14 a viz gouhere 1789 e oa achu ar renad kozh ha savet ur Frañs nevez.

Dilemel Stadoù Breizh

D'ar 4 a viz Eost 1789 eo votet fin an dreistwiriou ha fin gwiriou Breizh.

5 departamant krouet e plas 9 eskopti hengounel. Emsavadeg ar **chouaned** a-enep ar republik.

1799-1815: ar C'hoñsuliezh hag an impalaeriezh

Àr-lerc'h taol diskar-Stad 1799 get ar jeneral **Napoleon Bonaparte**, eñ a gemer ar galloud hag a sav ur renad aotrouniek.

E-pad ar maread e sav reformoù (Kod sivil, medaillhenn a enor, liseoù...)

1815-1848: monarkiezh bonreizhel

Àr-lerc'h bout trec'het Napoleon Bonaparte e 1815 e ta en-dro ar vonarkiezh e Frañs. Bevennet eo get ar parlamant.

1848-1852:Eil Republik

E 1848 e skarz ar C'hallaoued ar roue **Louis-Philippe** hag e voe embannet ur Republik.

An eil Republik a ya da get get taol-diskar-Stad e **brezidant Louis-Napoleon Bonaparte** (ni Napoleon 1añ).

1852-1870: an Eil Impalaeriezh

Àr-lerc'h taol-diskar-Stad e brezidant Louis-Napoleon Bonaparte a voe savet **an Eil Impalaeriezh** hag anvet **Napoleon III**. Edan e ren e voe **nevezaet ekonomiezh ar vro**.

1870-1940: an IIIvet Republik

Àr-lerc'h droukziwezh e 1870-1871 hag achumant impalaeriezh Napoleon III e voe savet **ar republik** ha kemmet mont-dro ar vro (laikelezh, demokratiezh...). Mont a ra da get ar Republik pa voe **trec'het Frañs e 1940**.

niverenn	deiziad	darvoud	Perak emañ talvoudus?
1	Kreiz an XVIIIvet kantved	Encyclopedie	Skrivet eo get Diderot ha d’Alembert hag a stroll holl ar gouiziegezhioù. Degas a ra soñjoù nevez da vare kantved ar Sklêrijenn. Lakaat a ra ar brederourien en arvar an hollveliegezh.
2	14/07/1789	14 a viz Gouere : krogad Bastilh Eost 1789	Ar bobl parizian a dag ar Bastilh, arouez ar galloud tidel ag ar vonarkiezh hollvedel.Deroù an Dispac’h gall eo. Embannet eo get ar vonarkiezh bonreizel un disklêriadur gwirioù Mab-den hag ar C’heodedad a ro gwirioù hag ingalded ha frankiz da rac’h an dud.
3	gwengolo 1792	Embann ar 1añ Republik	Diskar ar vonarkiezh hollvedel ha ganedigezh ur renad nevez get galloud ar bobl.
4	1804	Napoleon impalaer ar Franzision	D’an 2 a viz kerzu e ta Napoleon Bonaparte Napoleon 1añ.
5	1815	Kendalc’h Wien	An impalaeriezh kentañ a zo diskaret e 1815 goude d’ar Frañsizion bout bet trec’het e Waterloo.Ar Stadoù trec’h a adsav harzoù Europa .
6	1848	Torridigezh ar sklaverezh get Schoelcher	An Ilvet Republik a embann torridigezh ar sklaverezh àr an tiriadoù gall hag en trevadennoù.
		Mouezhiadeg hollek evit ar wazed	Rac’h ar wazed o deus ar gwir votiñ. A-raok e oa nemet ar re binvidikañ a c’helle votiñ.
7	1882	Lezennoù Jules Ferry	Dont a ra da vout laik, digoust ha ret ar skol evit ar vugale etre 6 ha 13 vlez.
8	1894-1906	Afer Dreyfus	Implij a ra Emile Zola ar c’hazetennoù evit sevel a-enep kondaoniñ ar c’hapiten Dreyfus rebechet dezhoñ bout bet treitet e vro.Ranniñ a ra an afer-se ar vro etre ar re evit Dreyfus hag ar re enep hag a goñsider an afer enepyuzev, broadelourel, gouennelourel
9	1905	Lezenn disparti an Ilizoù hag ar Stad	E 1905 e voe embannet ul lezenn a zisparti an Iliz katolik docr’h ar Stad. Kroget eo laikelezh hag ar frankiz koustiañs